

## ET NOËLS POPULAIRES BRETONS

87

Sant Josef gant peb civilite, a lavaras da Vari,  
 Mari, ma ne gellit bale, setu aoun eur marchossi;  
 Fors pegen kriz vo an amzer, evit tremen eun nosvez,  
 Mari ma ne gellit bale, e rekourfomp hon buez.

Var dro anternoz er bloaz-se, eur mabig a zo ganet,  
 An oll Elet d'euz an envou, d'an douar zo diskennel,  
 Hag o d'euz parlout annonset, parlout dre ar c'hampagnou,  
 Deuit pastor ha partorezet, da adori an Aoutrou.

Eur bloavez mad ha souhetan, demeurez a greiz va c'halon,  
 Ouspen e supplian Jesus, da rei he venedision.  
 Var ho tud ha var ho loened, da re goz prosperite,  
 Avantur vad d'ho tud iaouank, hag ar baradoz goude.

**Canomp un Nouël Angelic** (79 bis)

Canomp un Nouel angelic,  
 Canomp un Nouel angelic,  
 D'ar Verc'hes sacr ha d'he Mabic,  
 D'ar Verc'hes sacr ha d'he Mabic,  
 Canomp-ny oll assambles  
 Nouel, Nouel, canomp-ny oll Nouel,  
 Canomp-ny oll assambles  
 Gloar d'ar c'hinivelez.

Nos Nedelec da anter nos, (bis)  
 Pa voa an dud ecl da repos, (bis)  
 E voue ganet gant Mary,  
 Nouel, Nouel, canomp Nouel dezy,  
 E voue ganet gant Mary,  
 Ebarz eur marchossy.

## GUINNANÉE

Ælez an c'hen so estonet, (*bis*)  
 O velet Redemptor ar bed, (*bis*)  
 En ur baourentez quer bras,  
 Nouel, Nouel, canomp bian ha bras.  
 En ur baourentez quer bras,  
 Hac en ar Messias !

E Nam azeu d'e vriata, (*bis*)  
 Joseph a ouel gant joa onta, (*bis*)  
 Mary a zeu d'e vaillury  
 Nouel, Nouel, canomp gant melody.  
 Dont a ra d'e vaillury  
 D'e lacat en abry.

Dre un Æl guen e voe quelennet (*bis*)  
 D'an dud a henor Pastoret, (*bis*)  
 Evit donet da velet,  
 Canomp joayus, evel ar Bastoret,  
 Evit donet da velet,  
 Jesus nevez ganet !

Tri Roue bras eus a pell bro (*bis*)  
 O deus roet lod o mado, (*bis*)  
 Hac o deveus publiet  
 Canomp Nouel gant cals à joayusdet,  
 Hac o deveus publiet  
 E voa Jesus ganet.

Pobl ar bet-man, oll divunet (*bis*)  
 Prestet ho teod hac ho speret (*bis*)  
 Evit dont da adori  
 Ha do gana Noel gant melodi,  
 Evit dont da adori  
 Va Mestr hac hoc'h hini.